

Dastumad Pennwern : dornskrid 89

84. NOZ KENTA VA EURET

(follennoù 251 - 252)

Noz kenta va euret me m'boa kommandamant
Da vond da servich ar roue red eo beza kontant.

Da vond da servich ar Roue, red eo aboïssa
Or mestrez Franceza ne ra nemert goela.

Tavit, Francezaik, tavid na voelet ket
ben daou pe tri bla aman ne a deuo d'ho koëllet.

ben daou pe tri bla aman pe pevar da hira
Me a deuo d'ho koëllet, va mestrez Franceza.

echuet ar pevare, ar c'houec'h a deu ive
Ag ar mortollod iaouank er ger ne hari ket.

Ag ar verjeren iaouank a zemez adare.

Na pa voa arruet an de dimeus an euret
Ar martollod iaouank er ger zo arruet.
en an Doue bea lojet en deveus goulenet.

Me a vel arru an noz ne ouzon ket pelec'h monet.

eunan deus ar chervicherien e lavaras dezan :
Sortiit, den a arme, evid aman ne lochet ket
aman man an dud a euret tout e or accablet.

Ar martollod iaouank ne kemer mui a nec'h
en pen uella an dol ractal e ze savet.

E kichen e vestrez Franceza serten e c'hassezas
e kreis entre ar greg a euret ag ar greg a henor
e kommans da parlant gant kalz deus a henor.

Pelec'h e man ar voalen arc'hant alaouret, an diamant
am boa me roët diê deus tol ar Sakramant ?

- A possubl e ve, emizi, e ve te a ve aze!
Dec'h e voan intanvez hag errio meus daou bried
Non gant pini anezo da genta mond da kousket.

Mes kredi a ran certen, ervez va santimant
e kemerin adare va mortollot iaouank.

Cetu an den man a breman abandonnet
Mantret e galon nen deo ket eb sujet.

Laket eo en klac'har ag en dezolation
e vellet ne alle kaoud e brassa mignon.

- En tre zoc'h, tud iaouank, pere a ren ar bed
Ne reöt ket a promessa pel kent beza demezet.

Rag me zo lamet digane va douç, va muia karet.

vvvvvvv

Jannet Puill, 9 février 1851